

10

Oll da Zoue... ! an Hano kaer-ma
Ho harpo ouz ann dud difeiz
Oll da Zoue ! Skrivomp anezhan
Var gement karrek zo e Breiz.

11

Oll da Zoue... ! E pred ar maro,
Doue d'he dro ne nac'ho ket
Kement kristen mad a lavaro :
Biskoaz Doue n'em euz nac'het !!!

Imprimatur : E. FLÉTER,
Vicaire Général.




18570

8N3-3-035

OLL DA ZOUE !



Air français : *Nous voulons Dieu !*



DISKAN

*Klevit, o Mam a druez,
Peden hon tadou koz :
Oll da Zoue, epad hor buez
Oll da Zoue er Baradoz ! } *bis.*

1

Ni gar Doue e penn hor skoliou,
Hebd'han skol vad ne gaver ket ;
Ni gar Doue en hor lezennou,
Hebd'han nag urz na peoc'h ebet !

2

Ni gar Doue var hor meneziau,
Ni gar Doue var hor mor glaz,
Ni gar Doue e kreiz hor c'hoajou,
En hor c'halonou mil gueach c'hoaz !

3

Ni gar Doue en hor pardonieu,
Doue a ra ho levenez !
Ni gar Doue en hon eureujou,
Doue ho joa hag ho danvez !

4

Ni gar Doue, ni gar he lezen ;
Pell diouzomp, tud dizoue !
Ni gar Doue, ni gar ar beden,
Doue eo mesur hon ene !

5

Ni gar Doue hag he groaz santel,
Var gement hent, e kement ti !
Kroaz Doue a zo hor skoazel,
Hor miro da fallgalouni !

6

Ni gar Doue, ô tud digreden,
A c'hoanta hen diskar er vro.
Ni lavaro gant hor feiz kristen :
Kentoc'h mervel ivez d'hon tro !!!

7

Oll da Zoue hor bugaligou,
Hon tud iaouank o vont er bed !
Oll da Zoue, gant hor priedjou
Hon tud koz var hent ar vered !

8

Oll da Zoue, hor martoloded
En doun-vor dare da dremen !
Oll da Zoue, hor guir soudarded
E kreiz an tan, var an dachen !

9

Oll da Zoue e traon an Arvor,
Var ar menez hag en Argoat !
Oll da Zoue...! Setu hon enor,
Setu hon nerz e pep stourmat !!!